

Gab Liskildry, Le Febvre Gabriel-Marie (Goudelin
1863 - Goudelin 1927)

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Bet embannet e 1902.

Taolenn

E-tal ar waz.

O pesketa.

E-tal ar waz

'Korn ma frad eur feunteunig
Hag e-biou dezi eur wazig,
Eur wazig dour digemmesk
Nan¹ eo eet kammed da hesk.

Goude lein, me d'evesaad
Mar 'mañ 'n haleg o hlasaad ;
Pa deu d'an haleg bleunio'
'Zav ar goañv da vond en-dro.

'Tal ar waz kannerezed ;
(Ken sard ne oufeh gweled) ;
Troñset gante o mañchou,
Serret kleñk 'n o hasedou.

Herruz-herr 'ya ar holvaz,
Herrusoh an teodou c'hoaz ;
'Leh zo² diou blah 'vez marhad,
'Leh zo teir 'vez foar... dalhmad !

« Fañchonig, ar plah faro,
'Benn goueliou Pask a zougo,
(Vid he zad, o ! pebez neh !)
Heh enor war he divreh. »

« Yann e Gerniou, a Vod-Ska',
Eo gratis d'e ziskoa',
'Baoe eet kuit e wreg Kato,
Da skañvbennañ dre ar vro. »

« Lip 'zo manet, war 'glevan,
E zorn mad³ morzet outañ ;
Deski d'e zorn kleiz 'ranko
Hent ar werenn d'e heno'. »

« Lom Skraper 'blijje dezañ
Sammañ melchon an nesañ ;
Diwezañ gwech 'teuas en-dro
Gand eur choukad bahado' ! »

« Per Friter 'vanas war e lerh
Nebeudig a dra d'e verh :
'Lezi an oaled a huzel⁴
Ha logod treud er hrignel⁵ ! »

¹ Nan : stumm naha an tregerieg.

² zo : tregerieg : leh ez eus

³ E zorn mad : e zorn dehou.

⁴ huzel : huzil.

⁵ er hrignel : er hrignol.

« Katelig 'oa he mennoz
Moned d'an ebatou noz ;
Kouezet 'deus 'n eur poull hawe⁶
Ha hi yen sklaset abaoe. »

Pa deuas din eur gaouad paz...
Ar hannerezed 'davas !
Anez 'benn 'vije bet noz,
'Dije peillet ar barroz !

⁶ hawe : hao.

O pesketa

War don : Kêr-Iz.

Avel kuz-heol deuz ar beure,
Broutah on-devo c'hoaz hirie :
En ti, er-mêz, gwasañ tommder !
Da besketa gwellañ amzer !

« Yan, prim er prad da vuzuka !
Fañch, el lanneg da hwileta !
Hag, er hreiz-se, me a reizo
Glastrenn⁷, linenn hag higenno ». »

Gand difre paket ma zamm lein,
Ma zah pesketa war ma hein,
Me da redeg 'trezeg ar ster
'Vel 'h a d'an ebat an dañser.

Nag a lamm en dour ar pesked !
Kaerrañ fritadenn 'raoh nebed⁸ !
Flip ! flip ! beh 'zo war ar c'hwiled,
Mez foei warne ! n'int nemed darzed !

Du-hont, dindan eur bouchad gwern,
E tle bezañ dluzed dre vern ;
Deom goustadig a-gammed flour,
Anez... eet on hoan gand an dour.

Flip ! flip 'dare ! Paket unan !
Dreist penn⁹ 'm-eus stlapet el lann !
Gwall-fourgas 'ra du-hont, e kreh,
War an amann e vezo beh.

Pa vezin distro war ma hiz,
'Vo laret c'hoaz 'vel 'mañ ar hiz :
« Gand seurt amzer da besketa !
Me 'ouie n'ho-pije netra ! »

Me a droho : « Lezi ho keno'
E laoskit gevier divalo ;
Biskoaz den diotoh ? Naig ?...
Stouvit ho peg, ha d'ar billig ! »

Mez, ar pesk du-hont a oa poah¹⁰ ;
Hastom ken lakaad en on zah !...
'Tro' Doue !... an darvoud flemmuz !...
Da glesker setu eet ma dluz !

⁷ Glastrenn : gwalenn.

⁸ nebed : nebeud (evid ar rim).

⁹ Dreist penn : dreist ma fenn.

¹⁰ poah : dizehet.